

An Itrnn Vran, war he gwezenn kludet A zalc'he 'n he beg fourmaj gwenn, Lan al louarn, war e lost hir puchet, A gomzas outi evelhem: - Deiz mat d'eoc'h, Itron Vran eus ar c'hoajou, Na c'houi 'zo koant hirio, ha kaer ho tilhajou! Mardouen! ma ouezit kana Vel ma ouezit en em glinka, C'houi 'zo gwir rouanez laboused ar vro-ma"	perché Alain le Renard - accroupi lui parla ainsi de mat : bonjour. joli saprستي ! se parer vraie reine.
Kerkent, Bran ar c'hoajou, lorc'h emni, sot ato, Evit diskouez he mouezig vrao, A zigor bras he beg... Kouezet ar froumaj gwenn, Tapet gant Lan en eun taol krenn. - Itron Vran, Eme Dom Lan, Ne ouiec'h ket 'ta Ranker ato pea An enor hag ar meuleudi ? Eur gentel gaer am eus roet d'eoc'h-c'houi! N'eo ket paet re ger, moarvat, Gant eur fourmaj leun a c'houez vat!" Ar Vran, lostek, a douas, mez diwezadig, Ne vije tapet mui gant an trubard Lanig. Diwar La Fontaine, Gant Paotr Treoure.	fière sa belle voix tombé en un coup rapide dit Dom Alain (Renard) ne saviez-vous donc pas payer louange une belle leçon trop chère honteuse, jura le traître

Al Louarn hag ar Boc'h

Yann ar Boc'h a oa eun de - Tro kreizte Gant al Louarn o vale. Yann ar Boc'h en doa eur gwel berr, Hag Alan, hag Alan a oa divleuper. - Ekreiz miz eost, tomm e oa - Ken a oa Ha sec'hed bras o devoa; Hag evit terri o sec'hed, En eur puñs, en eur puñs o daou int lampet. - Goude m'eo ganto torret - O sec'hed - Ma daou ganfart 'zo nec'het. Ma daou ganfart tapet diês: Skeul ebet, skeul ebet vit dont er-mêz. - Evit 'n em jacha er-mêz - Komper gêz - Eme Alan, flour e vouez, Gwelet a ran sklêr mat an tu. Pariomp, pariomp mar karez dioustu. - Da dreid arôk te savo - Te harpo - Gant gwal da gein me bigno; Diwar da gerniel me lampo, Ha goude , ha goude ' e vezo da dro. - Yann ar Boc'h a chom souzet - Ha batet- Dirak kement all a spered. Ha raktal d'en em harpa start, D'ober skeul, dindan ar c'hanfart.	Alan, skañv ha garret ês - Lamm er-mêz Diwar gerniel ar Boc'h kêz; Dreist ar vardell war an douar, E kouee plomm, war e beder c'har. Hag hen d'ober d'e gomper - Berr ha ber Hen d'ober eur zarmon gaer: "Ar skiant an dalvoudusa "Eo bepred ar skiant prena" "Da harz luia da gudenn, - Birviken- "Dalc'h krog mat e-barz ar penn; "Rôk 'n em vouta 'n eun toull diês, "Gwel penôs, c'helli dont er-mêz." Alanig 'ra eul lamm - A ziskamp Hag adarre d'an daou-lamm, Da glask eur bleup all da flamma, Eur penn-yer bennak da goania. - Eus al lern, diwallomp mat, re daou di droad Digoromp hon daoulagad: Goude ver bet divleupet mat, Diwezat, diwezat ver d'en em lipat.
--	--